

# AR GEGIN

(cuisine)

## Kegin ur maner breizhat

(La cuisine d'un manoir breton)



Ar c'heginoù a oa en diavaez eus al lojeiz bras a-wechoù pe neuze er penn pellañ, evel amañ, a-benn diwall anezhañ diouzh an taniou-gwall. Ur bern mevelien a labourer er c'heginoù ha tomm-kenañ e oa enno. E kegin ar Roc'h-Ugu e oa teir oaled o vont en-dro hag ur forn da boazhañ bara ivez.

Koufroù, kanastelloù, skabelloù, bankoù ha taolioù a yae d'ober arrebeuri ar c'heginoù er Grennamzer.

Evit fardañ ur pred e c'halled ober gant meur a zoare poazhañ : en ur chaodouron a-ispilh ouzh un drezenn evit mitoniñ ar "soubennoù" (boued lakaet da virviñ evel ar geusturenn c'had pe ar c'hig-soubenn, gant legumajoù pe get) ; ouzh ar ber a veze troet evit rostañ ar c'hig ; pe neuze er pod trebez a veze lakaet war-eeun war ar regez hag a daped krog ennañ war-bouez ur vazh hir. Gant pep hini eus an tri oaled a zo e kegin ar Roc'h-Ugu e klot an tri doare poazhañ-se. En unan anezho, zo doubl, ez eus ur c'hustod evit derc'hel sec'h ar pourvezioù, an hollen da skouer.

Gant ar furchadegoù henoniel a zo bet graet e kastelloù zo e ouzer petra a zebre an dud er Grennamzer : kig-moc'h, kig-deñved, kig-gouez dreist-holl, hag ivez pesked dour dous (ar stêrioù pe ar muzoù), boued mor (pesked, kresteneged ha kregin), ha legumaj evit fardañ kefalennoù.

### **Ar forn vara**

(Le four à pain)



Er gegin ez eus chomet ur forn vara ma c'halled lakaat tourtennoù ha pastezioù da boazhañ asambles gant ar forniad ivez.

Bara a veze debret kalz er Grennamzer. An dudjentil ne zebrent nemet bara gwinizh (bara gwenn), tra ma veze debret bara segal (bara gris), galetéz ha yod kerc'h ivez gant ar beizanted.

War ar maez e veze graet bara gant an ed e ti an dud. E kêr e veze fardet ha gwerzhet bara gant baraerien pe bouloñjerien.

Melloù felpennoù bara tev, aet sec'h un tammig, hag a veze graet "trañchouerioù" anezho, a servije da asiedoù pe da bladoù evit ar c'hig ouzh taol an dudjentil. An trañchouerioù-se, soubet, a veze debret gant ar gouvidi pe taolet d'ar chas a-wechoù.

A-is ar forn vara, un dar-distrouilh a roe an tu da skarzhañ an dourioù lous, o klokaat evel-se aozadur ar gegin.

E porzh ar c'hastell ez eus ur puñs a servije da gaout dour a oa ezhomm war ar pemdez.

## Un aozadur klet ha speredek

(un aménagement confortable et astucieux)



Ul lec'h a bouez eus al lojeiz e oa ar gegin. Alies e oa en adraoñ, er c'hav a-wechoù ha tost d'ar sal. Kegin ar Roc'h-Ugu a zo e darempred gant ar sal vras dre bevar dorikell : an aozadur ijinus-se a oa diouzh an ezhommoù hag a blije kalz d'an dud betek fin ar XVI<sup>vet</sup> kantved. An digoroù-se a c'halled serrañ gant stalafioù koad bihan da ziwall ar sal draoñ diouzh trouz ha maged ar gegin. Aes eo dimp ijinañ ar bec'h a veze lakaet er gegin d'an devezhioù ma oa banvezioù, rak ober chervad ha digemer mat a oa boutin da vuhez holl dudjentil ar Grennamzer. Dibar e oa tiez-anez an aotrouien dre ma veze fardet ha serret

ar boued en ur pezh disheñvel (na oa ket anezhañ e tiez ar beizanted) diouzh ar sal voutin, graet evit an degemer hag ar bevañ.

Ar sal vihan en tour, gant ul leur uheloc'h eget hini ar gegin, a zo e darempred gant ar sal draoñ dre ur pempvet dorikell. Eno e oa korn ar boutailher sur a-walc'h, pe ar stal-voued pe neuze an adkegin.

# AR SAL DRAOÑ

(salle basse)

**Un ti-kreñv**

(une maison-forte)



Ne oa ket ur maner nag ur c'hastell feodel bras eus ar Roc'h-Ugu. E gwirionez e oa un "ti-kreñv", war un dro ti-anez ha kreñvlec'h. Heverk eo perzh ar c'hastell-kreñv war an talbenn a-dreñv hag un nebeudig elfennoù a ziskouez ar perzh-se ivez war an talbenn a sko war ar porzh : ar prenestroù, kaelioù warno, hag ar porched gwarezet gant ur mell dor-winterez diabarzh ha kreñvaet gant ur c'henstrollad treustoù tev. Ne c'halled mont er c'hastell nemet dre an nor-se.

En enep d'ar c'hastelloù a zo e kornioù-bro all eus Frañs, ez antreed diouzhtu er sal draoñ, ha pas dre dour ar skalieroù. An dra-se a zo dibar da vanerioù Breizh. Ar pezh-mañ a oa dezhañ un implij foran kentoc'h ha pouezus-bras e oa er c'hastell : drezañ e tremene an dud dre ret.

Betek ar bloavezhioù 1470-1480 ne oa nemet ar porchedoù a oa kinklet war talbennoù manerioù Breizh, hag a-us dezho e oa ardamezioù bosek an aotrouien (ne vezont ket gwelet ken er Roc'h-Ugu).

An tour-skalieroù balirek ha pompadus a servije da vont ha dont hag ouzhpenn-se e oa un arouez sokial a ziskoueze galloudegezh an aotrouien.

## E-kreizig-kreiz lojeiz an aotrou

(Au coeur du logis seigneurial)



Meur a dra a ziskouez pinvidigezh ar perc'henn er sal draoñ. Hirgarrezek ha bras-kenañ eo ar sal-mañ. Sklêrijennet mat eo gant he frenestroù bras, hag an oaled veurdezus, a dalveze da dommañ anezhi, eo he ferzh pennañ.

Kalonenn lojeiz an aotrou e oa ar sal draoñ : enni e veze an dud alies. An dorikelloù a ziskouez e veze debret ar predoù enni ivez ; ha dres, ur bern azezennoù ha taolioù a zo

meneget er renabloù a zo bet graet er manerioù goude marv an dud. Ar roll-leveoù hag ar pezhioù-moneiz a zo bet kavet e sal vras maner Santez Jenovefa, e Zinzag-Lokrist (Mor-Bihan), a ziskouez e c'halle an aotrou derc'hel e gontoù enni.

Met an darn vrasañ eus an tailhoù a veze paeet dre eskemm madoù ha pas gant arc'hant, ha sur a-walc'h e veze graet an eskemmoù er porzh kentoc'h eget e diabarzh ar c'hastell.

# AR SELIER

(cellier)

## Mirout ar boued

(Conserver les aliments)



Ar selier a oa ur sanailh evit serriñ ar boued (avaloù, kig...) pe ar barrikennadoù, met ivez an arrebeuri hag an dilhad-gwele. Un dar-distrouilh, staliet dindan ur prenestr eus ar selier, a c'halle servijout da skarzhañ an dourioù lous.

Ne oa morse oaled ebet er selieroù hag evit derc'hel un tamm freskter e oant sklêrijennet gant prenestroùigoù bihan. Amañ n'eo ket karrelloù a ya d'ober al leur met douar palumet. Dispartiet eo ar selier diouzh ar gegin gant ar sal draoñ hag emañ dindan kambr an aotrou, a c'halled mont enni dre skalier ar servijerien. Evel-se e oa ar pourvezioù muioc'h dindan evezh mestr an ti.

Ar c'hav-gwin, e-kichen ar selier, a oa damzouaret peurliesañ ; evel-se emañ er Roc'h-Ugu. Eno e veze lakaet ar barrikennadoù gwin pe sistr.

A-benn derc'hel gwelloc'h ar boued e veze mogedet pe sallet ar c'hig hag ar pesked. Al legumaj a veze lakaet da sec'hañ pe da c'hlec'hiañ er gwinegr.



# KAMBR AN AOTROU

(chambre seigneuriale)

Ur gambr liezimplied

(Une chambre aux nombreuses fonctions)



Ar gambr a oa estreget ul lec'h evit kousket er Grennamzer. "Kambroù" a veze graet eus ar pezhioù annez, lies ha cheñch-dicheñch o implij, pa c'halled, diouzh an dro, chom enno, degemer tud enno pe kousket enno. Tro-ha-tro kambr da ginklañ, pe kambr miret evit degemer tud nes, pe neuze kambr evit kousket da vat, kambr an aotrou a oa durc'haet ha tommet mat hag al leur a oa goloet gant broen plezhet.

Kambr an aotrou ne veze ket da live ar sal draoñ peurliesañ. En nec'h e oa, hag en un doare blizidik e oa kinklet. Dibar eo rikamanoù he frenestr diavaez, war an talbenn a sko war ar porzh.

E kambr an aotrou ez eus kornioù distro: ur gambr-dilhad (pe ur gambr-studi) ha privezioù. An daou lec'h-mañ hag ivez ar prenestroù gant menkoù hag an oaled vras a wellae aezamantoù ar pemdez.

Er Roc'h-Ugu, a-us kambr-dilhad an aotrou, etre lein an estaj kentañ ha plañchod an eil estaj, ez eus ur gambr vihan kuzh a vez gwelet he frenestr en diavaez. (N'eus ket tu da vizitañ ar pezh-se en deiz a hiziv.) Emichañs e veze serret an dielloù hag an traezoù prizius ennañ, evel en ur "gambr-greñv".

# SAL AN AOTROU

(salle seigneuriale)

An degemer er c'hastell

(Recevoir au château)



Sal vras an aotrou, en estaj kentañ (al lec'h noplañ ar gwellañ), a veze miret da lec'h annez. Eno, e sal ar pompadoù, e veze banvezioù prevez hag eno e c'halle mistr an ti diskouez e listri brav. Ar gredañs, ur seurt armel-voger e stumm ur c'hustod war hantergelc'h e donder ar voger, a servije da ziskouez traezoù prizius e-pad ar gouelioù. Kalz staliadurioù diloc'h evel-se a veze e tiez ar Grennamzer. Ar vrientinien, dre ma veajent alies, o doa ezhomm da gaout arrebeuri skañv, aes da zivontañ.

Sal an aotrou a oa ivez ur pezh ma veve an dud hag ur sal-debriñ ma c'halled staliañ gweleoù, ur wech tennet kuit an azezennoù hag ar skabelloù. Ouzh ar mogerioù e veze pallennoù ha gwiadoù atav, ha kinklet e vezent alies gant livadurioù. Al leur a veze goloet a c'heotennoù frondus, bleunioù ha pallennoù broen. Diouzh an dro e oa ul lec'h tremen pe ul lec'h degemer ; cheñch a rae implijoù ar sal hervez an ezhommoù ha diouzh doareoù bevañ mistri an ti.

# AR CHAPEL BREVEZ

(chapelle domestique)

**Amzer ar bedenn**

(Le temps de la prière)



Ar chapel brevez a oa digor war ar sal met tu a oa ivez da serriñ anezhi dre ur stalaf toullek e koad N'eus nemet er pezh-se ma'z eus prenestroù gant gwerennoù-livet. Div logell vihan tommet gant oaledoù a ya d'ober ar pezh dibar-se. An daou orator a zo dispartiet diouzh an aoter gant prenestroù bihan gotek e tufev (a vez graet hagogskopoù anezho). Dre ar prenestroù-se e oa tu d'an aotrou ha d'e wreg da glevet an oferenn. En unan eus an div logell ez eus un armelig-voger evit lakaat al levrioù prizius, an dornskridoù hag an traezoù sakr.

Seurt santualioù enframmet, damheñvel, gant o "petits chauffepieds", a oa ivez e noblañsoù all eus Breizh evel e Kastell Tonkedeg, Susinioù, Kastell an Hak ha Maner Kerouzere.

# AR GAMBR

(chambre)

**Diduañ e amzer**

(passer le temps)



Er gambr-mañ ez eus meur a aezamant a oa boutin da lec'hioù prevez al lojeiz, evel ar menkoù e toull ar prenestrer, an oaled, ar privezioù hag e-kichen, ar pezh bihan liestuek – kambr-studi pe kambr-dilhad – tommet ha kuzhet diouzh ar servijerien, daoust ma c'halled mont ennañ dre ar sal evit gallout eveshaat an Trev.

En ur bern pezhioù eus ar c'hastell ez eus prenestroù gant menkoù. Er XV<sup>vet</sup> kantved e oa muioc'h-mui eus ar skaonioù maen-se el lojeizoù (betek 85% eus ar prenestroù e fin ar c'hantved), met er XVI<sup>vet</sup> kantved e voe un digresk ha mont a rejont da get er XVII<sup>vet</sup> kantved abalamour da c'hiz an azezennoù koad. A-wechoù ez ae maouezed ar c'hastell da azezañ warno da wriat pe da vrodañ ouzh sklêrijenn an deiz, pe neuze chom da sellet er-maez paneveken.

E-kerzh ar furchadegoù henoniell a zo bet graet e maner Zinzag-Lokrist ez eus bet kavet, en unan eus ar c'hambroù, ur veskenn da wriat e-mesk kantadoù a spilhennoù etre ar prenestr hag an oaled, dres el lec'h ma veze gwreg an aotrou o wriat.

# AR SAL

(salle)

## Lojeizoù cheñch-dicheñch

(Des logis à géométrie variable)



Aozadur an eil estaj a zo heñvel ouzh hini an adraoñ hag hini an estaj kentañ : ur pezh bras hirgarrezek a veze anvet "sal", ma teue an holl, hag a bep tu pezhioù all, bihan ha karrezek, a veze graet "kambroù" anezho (a c'halle bezañ estreget lec'hioù kousket). An tres teir elfenn-se, gant ur sal greiz, a weler ivez e tiez Bro-Saoz ha Normandi.

Er XV<sup>vet</sup> kantved e oa sal vras an eil estaj da live diwezhañ lojeiz ar Roc'h-Ugu : er penn-kentañ e oa ur sal goloet gant ur framm war-wel evel ma oa diouzh ar c'hiz d'ar mare-se. Ret eo ijinañ salioù bras ar c'hastell gant o arrebeuri, o stignoù, o skabelloù hag o speurennoù heloc'h e koad a yae da frammañ ha da aozañ al lec'h. Ar sal-mañ, gant div oaled, a oa sur a-walc'h rannet e div lodenn dre ur speurenn heloc'h e koad pe dre stignoù a-ispilh ouzh treustoù, rak div zor a zigore war an trepasig (ur c'haridell e koad n'eus ket anezhi ken) ha div all war an hent-ged. Dre an trepasig, a-hed an talbenn eus tu ar porzh, e oa tu da vont d'ar privezioù, e-pign ouzh tal ar c'hastell, ha da vont-dont etre ar pezhioù a oa a bep tu d'al lojeiz hep tremen dre ar sal. Gant ar c'haridell-mañ ivez e oa ar skalier meur e darempred gant ar gambr ha digor al lojeiz war an diavaez.

# AR GAMBR-DILHAD

(garde-robe)

**Klet ha yac'h**

(confort et hygiène)



E-kichen pep kambr e veze bep tro pe dost ur pezh kuzhet a c'halle servijout da gambr-studi pe da gambr-dilhad. Er Grennamzer e veze tommet ar c'hambroù-dilhad hag annezet e vezent gant koufroù. A-wechoù e veze lakaet gweleoù bihan enno, evit ar vevelien alies. Eno ivez e oa tu da gibellañ en ur bailh koad, nemet e vefe lakaet hemañ er gambr, e-kichen ar gwele. D'ar mare-se – en enep da gantved Loeiz XIV – e veze kibellet alies, dre ma oa brudet an dour evit bezañ madoberus ha glanaus. Daoust da se ne oa pezh ispisial ebet evit se er c'hastell rak trawalc'h a vevelien a oa evit diblasañ, leuniañ ha goullonderiñ ar c'hibelloù koad bras a-raok renkañ anezho er galatrez. Privezioù (toulloù graet er maen) a c'halle bezañ da veur a estaj, an eil war-benn egile. Ar privezioù uhelañ a c'halle digeriñ war an diavaez (evel da live kambr ar galatrez).

# AN HENT-GED

(chemin de ronde)

## Ul lec'h difenn

(Un site défensif)



Kastell ar Roc'h-Ugu, savet war-lein un uhelenn a valir a-us an Trev, n'eo nemet un tamm eus un dalc'h feodel brasoc'h. Ar c'hastell-mañ a zo test eus ur rummad kreñvlec'hioù a voe savet a-hed aber an Trev etre Pontrev hag Enez-Vriad.

Lec'hiadur ar savadur, en ul lec'h distro, uhel, ha doare ar savadur e-unan, a ziskouez mat e oa un domani feodel. Perzh ar c'hastell-kreñv a zo heverk-kenañ eus tu an talbenn a-dreñv a sko war an Trev, abalamour d'an tarzhelloù, d'an hent-ged gant balegoù, d'an touribelloù-ged ha d'ar c'hambroù-ged. E 1486 e teuas Pêr Pean, aotrou ar Roc'h-Ugu, da vezañ pennletanant an dug evit eskopti Landreger. An hent-ged hag un nebeud staliadurioù diabarzh (chapel, lod eus ar siminalioù hag eus ar prenestroù) a voe savet d'ar mare-se emichañs.

Ha koulskoude ne voe ket kalz distrujoù na dismantrou er Roc'h-Ugu adalek ar XV<sup>vet</sup> kantved, evel ma oa bet er XIV<sup>vet</sup> kantved, nemet en adtiez a oa a bep tu d'ar porzh (marchosioù ha tiez-lojañ) e-pad Brezelioù ar C'hevre, dre ma oa ar c'hastell e dalc'h soudarded ar C'hevre betek 1592. Difennoù ar c'hastell a zo test eus youl ha statud sokial e saverien er XV<sup>vet</sup> kantved.



# AR SAL VIHAN

(petite salle)

## Oaledoù meur

(Des cheminées imposantes)



Ar sal vihan-mañ ne oa ket prevez, evel an hini a zo er penn all, met kas a rae war un dro d'ar c'haridell goad ha d'an hent-ged, dre he div zor. Evel en holl bezhioù all ez eus un oaled enni.

Niverus e oa an oaledoù er Roc'h-Ugu dre ma tegasent aezamantoù ha dreist-holl dre ma oa ezhomm anezho evit tommañ salioù uhel an ti-annez. Reiñ a raent sklêrijenn ivez, muioc'h eget ar goulaouennoù pe ar c'hantolorioù, evit ar beilhadegoù hir a-walc'h e-pad ar goañv.

Naontek oaled a zo ha kemend-all a siminalioù, o-unan, doubl, pe tripl zoken, ar pezh a ra da stumm ar savadur bezañ ken dibar. E beg ar siminalioù induet ez eus togennoù kinklet gant plakennoù maen-glas moan e stumm lankelloù, heñvel a-walc'h ouzh rikamanoù ar c'hiz c'hotek flammek. Seurt begoù siminal a zo boutin d'un nebeud manerioù kempred a zo en trowardroioù, evel maner ar C'harrpont e Tredarzeg pe La Bellière, nepell diouzh Dinan, met kavet e vezont ivez e savadurioù ken meurdezus ha kastelloù Naoned, Saumur pe Loches.

# AR GALATREZ – AR SAL VIHAN

(combles- petite salle)

## Framm ar galatrez

(L'architecture des combles)



Ar sal veur ha sal vihan an eil estaj a oa goloet gant ur framm war-wel kinklet, evel en ur bern manerioù eus Breizh, e fin ar XIV<sup>vet</sup> kantved hag e-pad hanterenn gentañ ar XV<sup>vet</sup> kantved. Kaer-kenañ e oa ha degouezhout a rae brav gant ar pompad a zeree ouzh an noblañs. Div sal an eil estaj a voe solieret er XVI<sup>vet</sup> kantved pe e fin ar XV<sup>vet</sup> kantved. D'ar mare-se ne oa ket ar c'hiz ken e Frañs da gaout pezhioù dindan ur framm met pezhioù solieret gant treustoù ha solioù pe gant ur c'hombod.

Er Grennamzer e oa ar c'hoad un danvez aes da labourat ha rekis evit an tisaverezh, pa c'halle kemer plas an houarn hag ar maen alies-tre. Framm ar galatrez a veze savet gant ar vistri-kilvizien a implije ostilhoù damheñvel ouzh an heskennoù, ar morzholioù hag an talaroù a vremañ.

Ar frammoù a c'halle bezañ savet hervez teknikoù ha stummoù disheñvel, met an "assemblaj" (lakaat ar pezhioù koat da glotañ an eil re er re all, kuit d'ober gant houarn) a oa al lezenn gentañ.

# AR GALATREZ – AR SAL

(combles - salle)

## Ar saverien kastelloù ha manerioù

(Les bâtisseurs de châteaux et de manoirs)



Evit sevel ur c'hastell e oa ret labourat gant danvez krai : mein (kantadoù a donennoù) a oa da zegas eus ar mengleuzioù, koad (kantadoù a sterioù) evit ar savadur met ivez evit chafotoù ha koatajoù ar vañsonerien, houarn evit an ostilhoù. Ret e oa kaout dour ivez ha loened evit dougen pep tra.

Seurt chanterioù a vode ur bern labourerien : tisavourien, mengleuzierien, benerien mein, farderien pri-raz ha mañsonerien, hag ivez kilvizien, goved hag ur bern micherourien a laboure evel darbarerien. Pep micher a veze renet gant ur vreuriezh pe ur c'horfuniad ma oa un urzhaz, "arnodennoù" hag ur c'hef kenskoazell evit an darvoudoù labour.

Ar vicherourien, ar venerien mein dreist-holl, a veze paeet "diouzh ar marc'had". War bep maen benet e lakaent ur merk, evit ma vefe priziet ha paeet o labour hep faziañ.

# AR GALATREZ – AR GAMBR

(combles - chambre)

Ur galatrez annezet

(Des combles habités)



Adalek deroù ar XV<sup>vet</sup> kantved e oa, dindan toenn kastell ar Roc'h-Ugu, un eil estaj goloet gant ur framm war-wel hag ur gambr vihan kempennet en ul lodenn eus ar galatrez. Ar gambr-mañ a oa tu da vont enni dre skalier ar servijerien. Ur pezh prevez e oa kentoc'h, gant un oaled vrav, ur gambr-dilhad ha privezioù savet, emichañs, war valir ouzh tal ar c'hastell evel m'en diskouez ar c'horbelloù balirek.

Diaes eo gouzout resis pe re eus tud an tiegezh (magerezed, mevelien...) a implije ar gambr-mañ, gant he c'hambr-dilhad, seul vui ma'z eo bet cheñchet implij lod eus ar pezhioù gant an amzer hag ar berc'henned. Ar galatrez pe an hent-ged a zo bet adkempennet da skouer.

N'eus ket trawalc'h a roudoù ha mankout a ra furchadegoù henoniel pe dielloù evit respont d'an holl c'houlennoù a sav diwar-benn an ti-anez-mañ, etre aspadennoù ur savadur kentañ a voe distrujet ha kemeret da ziazez evit chanter 1405 hag ar prantadoù war-lerc'h. Un nebeud traoù a chom c'hoazh da zizoleiñ e Kastell ar Roc'h-Ugu...